

Ar c'hoz den Yaouank

All Modo

Cho - met ez on da go - za ha n'on ket
 di - me - zet Vel - se ez on gwe - let fall gant an di -
 me - zel - led Mez ar mer-c'ched zo bre-man
 N'int ket holl diouz ma c'hoant se - tu a - ze vit
 perag on cho - met den yaou - ank.

1^{er} KOUPLAD

Chomet ez on da goza ha n'on ket dimezet,
 Velse ez on gwelet fall gant an dimezelled,
 Mes ar merc'ched zo bremain n'int ketoll diouz ma c'hoant,
 Setu aze vit perak on chomet den yaouank.

2^e KOUPLAD

7^e KOUPLAD

Pac'h efet da gaozeal gant an dimezelled,
 Dalc'het ho tog en ho torn, ho korf hanter-bleget ;
 Red'vo d'ach bez'a gogez m'ar n'ho pe ket ho c'hoant,
 Setu aze 'vit perak on chomet den yaouank.

8^e KOUPLAD

Da ober ho kae'r otro, laket eur liviten,
 Eun tog fonz hirr war ho penn, war ho piz eur wal'en ;
 C'houi ra eur bern ardou fall evit plijout da Fant,
 Setu aze 'vit perak on chomet den yaouank.

9^e KOUPLAD

An hini zalc'h eur veri a c'hopra eur vatez,
 Da c'hor, da ribotat, da gas ar zaout da vez,
 Rag e verc'h nan houllo ket lajet he zreid er fank,
 Setu aze 'vit perak on chomet den yaouank.

10^e KOUPLAD

An tad a vo er parkou dindan an holl amzer,
 Mes e zimezel yaouank chomo bepred er ger,
 Lenn ha zon ar piano, ober ze he deus c'hoant,
 Setu aze vit perak on chomet den yaouank.

Velse ez on gwelet fair gant an dimezelled,
Mes ar merc' hed zo breman n'int ketoll diouz ma c'hoant,
Setu aze vit perak on chomet den yaouank.

2^e KOUPLAD

Gwechall ar merc' hed yaouank a glaske labourat,
Kanna, gwenna rochedo, ober stam ha gwriat ;
Mes ar re a zo breman a zo 'klask beza koant,
Setu aze 'vit perag on chomet den yaouank.

3^e KOUPLAD

Vel ma int bet pell er disket skol, 'deus ar galleg,
Kaozeal, lenn ha skriva evel advokaded ;
Da labourat, a gredan, hini 'ne n'he deus c'hoant,
Setu aze 'vit perak on chomet den yaouank.

4^e KOUPLAD

Gwelloc'h ez eo eur vatez hag a :ervicho mat
Vit nan e eun dimezell pa oar ket labourat ;
Ne vo ket pell o tigas eur mil lur da bemp-kant,
Setu aze 'vit perak on chomet den yaouank.

5^e KOUPLAD

An dilhad eus ar c'haera a renko da gavet,
Eur roben borded gant zaei hag eun tog alaouret,
Hag alies d'o faea renko amprest arc'hant,
Setu aze 'vit perak on chomet den yaouank.

6^e KOUPLAD

Betek ma vo bevet mat, jist ha gwin da evet,
Eur zal hag eur piano, eur gampr kaer da gousket,
C'noaz ne brizo ket memes skubat, netât he c'hamp,
Setu aze 'vit perak on chomet den yaouank.

10^e KOUPLAD

An tad a vo er parkou dindan an holl amzer,
Mes e zimezel yaouank chomo bepred er ger,
Lenn ha zon ar piano, ober ze he deus c'hoant,
Setu aze vit perak on chomet den yaouank.

11^e KOUPLAD

Pa ve eur pardon er vro, 'c'ha annoz da zansal,
Klevet e vez o c'hoarzin hag he zreid o strakal ;
Neuze n'he deve ket aon da lampat 'kreiz ar fank.
Setu aze 'vit perak on chomet den yaouank.

12^e KOUPLAD

Pan arru ar verc'h er ger, an dud a ve kousket ;
An tad a hunvreo stard, ar vamus a vo nec'ket ;
Neuze 'vo klevet Janed o vont dousik d'he c'hampr,
Setu aze 'vit perak on chomet den yaouank.

13^e KOUPLAD

An de warlerc'h e chomo 'pad an de 'n he gwele,
Gant an droug en he diouar, petramant n' he c'hoste ;
A greiz e oa o tansal... he devoa bet eul lamp,
Setu aze 'vit perak on chomet den yaouank,

14^e KOUPLAD

Breman e vin brudet fall gant an dimezelled
Koulskoude ar wirionez am eus d'e lavaret
N'o deus nemet labourat hag espern o arc'hant,
Neuze vo gwelet nebeut a goz potred yaouank.

Daniel TREDANER.

(Reproduction rigoureusement interdite)